

13.

Ni zo disterik,
Bresk evel korz :
Renit hor bagik
Betek ar Porz.

14.

Dor aour an Envou,
Chomit dibrenn :
Rak xar ho treujou
Ni dle tremenn.

15.

Hag er Baradoz,
'Kreis an dudj,
Ni 'gano bennoz
Deoc'h, o Mari.



Imprimatur :

Quimper, le 7 Août 1923.

P. MESSAGER, vic. gén.

 Kemper, mouliet e ti de Kerangal.


DA

ITRON VARIA AR PORZOU

MEULEUDI HA PEDEN



DISKAN :

Ave, ave, ave Maria (bis).


*Pe : Meulomp, meulomp Itron ar Porzou,
Kanomp, kanomp he madelezou.*

1.

Stereden skédus,
Dor an Envou,
Bodet omp joañus,
En ho Porzou.

2.

E kreiz douarou
Ar Vretonet,
Chapel ar Porzou
A zo brudet.



3.

Nag a vurzudou
Bet gret enni,
Hed ar c'hantvejou
Gant dorn Mari !

4.

Nag a voalinier
Bet kaset pell,
Dre c'halloud tener
Ar Vamm zantel !

5.

Ar C'hastelnevez
A zo eurus,
Gant eur Rouanez
Ken galloudus.

6.

Divar e zorgen,
Mamm vad Jezuz
A rô d'ar c'hristen
Grasou nerzuz.

7.

Aman eur belek
En deus guechall
Stourmet kalonek
Enep tud fall :

8.

En deus diouallet
Korf e Zalver,
Hag eo bet lazet,
'Vel eur merzer.

9.

Tud kez ankeniet
Deuit d'e fedi :
C'hui vo diboaniet
Buhan ganti.

10.

Pec'herien dallet,
Goullit pardon :
C'hui gao digoret
Dor e c'halon.

11.

O Guere'hez santel,
Roit, hep dale,
Ho kuella skoazel
D'ho pugale.

12.

Var mor digempen
Ar bed diroll
Ni fell deomp tremen,
Hep mont da goll.